




Relegou Sant Erwan, o tont eus Iliz-Veur Landreger.

Photo J. SAVINA.

Bleun-Brug

Niv. 51

GOUERE-EOST 1952

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.
Koumanant a enor : 600 lur.
Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, 65, rue Y.-Collet, Brest.
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

Prezegenn an Tad Colliot e Landreger	1
Bleun-Brug Landreger, gant Maodez Glanndour	4
War bont Landreger, gant Eynig Penn-ar-C'hoad	7
A-dreuz va sonjou e skeud ar manati, gant Laouenanig Breiz..	8
Burzud Sant Efflamm, gant Yann Tranvouez	10
Kenstrivadegou ar Bleun-Brug	12
Kornig ar vugale, gant K. Riou	14
Skouer Tignes, gant Melar	16
Edon hep lojeiz, gant L. B.	



133665

Prezegenn an Tad COLLIOT

Abad Kerbeneat-Landevenneg
da oferen-bred ar Bleun-Brug, e Iliz-Veur Landreger

Kalon Breiz — Kalon Sant Erwan.

« Cor mundum crea in me Deus. »
Aotrou Doue, lakit ennoun eur galon c'hlan.

AOTROUNEZ ESKIBIEN,
ABADED ENORUS,
VA BREUDEUR HA VA C'HOAREZED KRISTEN,



Setu aze ar bedenn a rae sant Erwan, stouet dirak an Aoter, an dour en e zaoulagad, araok lavaret e oferen.

Sonjal a rae e Kalon Hor Salver o vont d'en em ginnig etre e zaouarn ha leun a gement a vadelez evidomp.

O welet pegen dister e oa e galon, e keñver ar Galon-Zakr-se, sant Erwan a aspede an Aotrou Doue da lakaat en e galon muioc'h a c'hlanded, muioc'h a garantez.

Kalon sant Erwan ! Met perak komz eus kalon d'ar mare-mañ ?

Mar fell d'ar Bleun-Brug, lida bep bloaz e c'houeliou bras en eur c'horn brudet a Vreiz-Izel, eo evit diskleria dirak an holl, ha da genta dirak ar Vretoned, peseurt kalon eo kalon Breiz.

Mar domp diredet hirio e ker santel Bro-Dreger, eo dre ma kredomp o deus hor Sent graet ha stumet kalon hor Bro, ha dre ma fell d'eomp adnevezi ar galon-se ouz kalon sant Erwan.

Ha mar domp bodet er mintin-mañ en-dro dan Aoter, eo evit, a-unan gant sant Erwan, lakaat hor c'halon tost ouz Kalon Hor Salver, ha dre-se, tomma ha kennerza hor c'harantez ouz an nesa, hor c'harantez evit Breiz.

Petra eo kalon Breiz ?

Selaouit hor c'hantikou, selaouit hor c'hanaouennou a zo ken dudius da glevet hag a zo ken doun en hor c'hreiz.

Grit eur sell ouz hor gwiskamanchou a zo ken brao ha ken kempenn.

Gwelit korollerien hor goueliou o trei asamblez ken dilo ha ken dereat.

Digorit al levriou a zispleger enno istor hon tud koz, koulz taoliou kaer ar re vrudeta ha labour pemdeziek ar re zistera.

Lezit da goueza en ho kalonou gwerziou diwanet ken flour e kalon hor barzed.

Selaouit kement hini a gomz c'houek eus tud hor bro, ha klevit pegen drant, pegen nerzus eo o c'homzou, pegen yac'h, pegen saourek hor yez war o muzello.

Hag e ouezot neuze gwelloc'h petra eo kalon Breiz, rak en holl draou-se, he gwad a red, beo ha hirvidik atao.

Setu perak ar Bleun-Brug, feal d'e ziazezeour, an Aotrou Yann-Vari Perrot, eur beleg hag eur breizad eus an dibab, a boagn ken kalet, a labour ken start, bloaveziou a zo, evit ma chomo enoret ha beo en hon touez, hor yez hag hon istor, hor c'hanaouennou hag hor gwiskamanchou, hor gizioù ha kement a zeu d'eomp a-berz hon tud koz, rak kement-se holl a red evel ar gwad eus kalon Breiz.

Ar galon-se, unan eus ar re gaera en deus graet an Aotrou Doue, unan eus ar re garantezusa hag ar re gristena a zo war an douar, a dalv beza anavezet ganeomp, a dalv beza doujet gant an holl.

Ret eo d'ezhi gellout kenderc'hel da veva.

Ret eo d'ezhi larmat kreñvoc'h kreñva e kreiz pep Breizad, evit ma c'hello Breiz, chom, pe kentoc'h dont a-nevez da veza ar pezh m'eo bet.

Evit ma c'hello Breiz ober, en iliz hag er bed, al labour fiziet enni gant an Aotrou Doue.

Mez evit gouzout mat petra eo kalon hor Breiz, ret eo gouzout mat petra eo kalon hor Sent.

Rak int-i eo o deus luskellet ha maget kalon hor Bro.

Evel m'eo kalon eur bugelig, araok dont war an douar, maget gant gwad kalon e vamm, evel-se ivez eo bet maget kalon ar Vretoned, gant ar c'homzou, muioc'h c'hoaz gant ar vertuzioù a zirede eus kalon hor Sent.

Rak biskoaz den ebet e Breiz n'eo bet doujet ha karet eveldo.

E pelec'h embann gwelloc'h ar wirionez-se, eget en iliz-veur-mañ, dirak bez sant Erwan ?

Piou 'lavarô pegen doujet eo bet gant tud e amzer, ha pegen doujet eo c'hoaz, sant Erwan, a lesanver ar beleg santel ?

Piou 'lavarô dreist-holl, pegen karet eo bet ha pegen karet e chom gant an holl ?

Gant an dud keiz hag a zirede d'e gaout, evit difenn o gwir a-eneb ar re o brese.

Gant ar bec'herien hag a en em vode ken start e-kichen e gador govez.

Gant ar bobl kristen hag a zirede ken stank da glevet e brezegennou.

Gant ar beorien hag a re glañv, a veze e presbital Louaneg, pe e Maner Kervarzin, leun anezo bemdez.

Sant Erwan a zo bet servicher d'ezo holl.

Bet eo bet evito gwelloc'h eget ar gwella eus an tadou, teneroc'h eget an tenera eus ar mammou.

Roet en deus d'ezo, hep muzul, hep marc'hata, e zavez hag e amzer, e nerz hag e boan.

Roet en deus d'ezo e vuhez penn-da-benn, betek e huanad diweza.

Setu penaos, evel ma lavare eur bedenn goz, en deus desket d'an holl, lezenn ar garantez.

Setu penaos, o kenderc'hel gant al labour-se, boulec'h gant sant Tugdual hag hor Sent koz, en deus sanket al lezenn-se doun e kalon hor Bro.

Pet ha pet, e-doug ar c'hantvejou, o tont da belerina da Landreger, o tont da zaoulina dirak bez sant Erwan, pet o deus kavet amañ an nerz da zilezel o c'hasoni, d'en em zistaga diouz eur garantez direiz evito o-unan, hag a zo bet distroet d'ar ger leun o c'halon a deneredigez hag a vadelez evit o nesa.

Ya, lavarout a c'heller, e gwirionez :

Eus kalon sant Erwan, e tiredas a boullad evel eur gwad beo a zo en em skuilhet e kalonou milieroù ha milieroù a Vretoned, o lakaat enno eur garantez c'hlan, nerzus ha tener.

Ni a zo amañ, evit trugarekaat an Aotrou Doue da veza roet d'eomp sant Erwan, ha da veza laketa e kalon hor Bro, ar garantez en devoa laketa e kalon hor Sant.

Ni a zo amañ, evit lakaat hor c'halon dirak kalon sant Erwan ha goulenn ouzomp-ni hon unan ha din eo atao hor c'halon eus e hini.

Al va Breudeur kristen, ma ve ret da bep hini ac'hanomp diskouez e kalon, ha ma c'hellfe daoulagad an holl he gwelet ouz sklerijenn an Aotrou Doue, petra gavfed enni ?

Daoust hag e vije enni eur garantez dinam, tener, eur garantez evit an holl evel ma oa e kalon sant Erwan ?

Siouaz ! Piou ac'hanomp ne rankfe ket anzañ krisder, yenien e galon ha karantez direiz evitañ e-unan.

Piou ac'hanomp ne rankfe ket lavaret evel sant Erwan, ha gant muioc'h a abeg a-dra-sur :

« Cor mundum crea in me Deus. »

Mes ni a zo en oferenn.

Kalon dinam Hor Salver a zo digor d'eomp, a en em ginnig evidomp.

Ar galon-se eo he deus stummet kalon sant Erwan.

Hi eo he deus he maget gant he c'harantez he-unan.

Kinnigomp anezi da Zoue evit ma vimp gwalc'heta en he gwad.

Kinnigomp anezi evit ma vezimp renevezet en he c'harantez.

« Cor mundum crea in me Deus. »

Greomp ar bedenn-se, an eil evit egile.

Greomp ar bedenn-se, evit hor Bro he-unan.

Aotrou Doue, ni a ginnig d'eo c'h kalon hor Breiz. Netait, tommit, nevesait anezi ouz Kalon Zakr Hor Salver, ha kalon sant Erwan.

Grit ma tale'ho start atao d'ar pezh m'eo bet abaoe ma'z eus anezi.

Grit ma tale'ho start dreist-holl d'ar Sent o deus he stummet hag he maget gwechall.

Ra gendalc'ho da lammat atao, a-unan gant kalon sant Erwan, evit ma c'hello Breiz derc'hel splann etre he bugale, ha lakaat da ren muioc'h-mui en iliz hag er bed, lezenn sakr ar garantez.

Nan eus ket en Breiz, nan eus ket unan,

Nan eus ket eur zant evel Sant Erwan.



Releg eus brec'h sant Erwan, eus pàrrez Bubry (Morbihan), douget gant kanerien Santez-Anna, e prosesion Bleun-Brug Landreger.

PHOTO JOS LE DOARÉ

BLEUN-BRUG LANDREGER



Kanerien skolaj Lannuon a kana er Bleun-Brug.

PHOTO JOS LE DOARÉ

PREST e oa pep tra : ar C'hlostr evit an abadenn-sonerezh, plasenn an Iliz-veur evit ar c'hoari-noz, park bras ar Minihi evit an oferenn hanter-noz, park ar Sportou... leurennoù-koad, an aoter goad gant ur groaz vras a-us, an uhelgomzerioù, al lampou... Prest e oa pep tra, labouret e oa bet gant pep hini eus e du, eus e wella. Bremañ ne oa ken da c'hortoz nemet hag-eñ trofe mat ar mekanik. Hag -eñ ne vo ket glao ? Daoust hag e teuio an dud ?... Ur morad a dud a zo bet. Kaer-dispar eo bet an traou. Sant Erwan ra vezo meulet !

Ar prezegennoù d'ar gwener d'abardaez, ma krog ganto ar c'hendalc'h, a vez graet evit ar c'hant bennak a dud a blij dezo klevout prezegennoù e brezoneg, n'eus forz diwar benn petra e vijent. Met droukprezeg a ran, rak plijadur vras hon eus bet o klevout Visant Seite o tibuna dimp labour ar Bleun-Brug a-hed ar bloaz, al lizerou kaset gantañ, an abadennou sinema roet e-pad ar goañv gant filmou ar Bleun-Brug, bodadeg ar yaouankiz e Brest da vakañ-sou Meurlarjez, ar Bleun-Brugou bihan e Gwerran, Pontekroaz, Plougernev, Baod...

Ar gwener d'abardaez a zegase dimp un dra nevez : un abadenn sonerezh uhel. Diwanet e oa en hor penn ar sonj vefe kaer-meurbet klevout e klostr an Iliz-veur; ken brao, ken peoc'hus, traou savet gant hon musikerien breizad, gant tud ken anavezet dre ar bed ha Ladmirault (eus Naoned), Yann Kras (bet amiral e Brest), Gwi Roparz (o veva bepred e Lanloup), Paol ar Flemm (eun den eus Bro Dreger). Peziou a sonerezh-sal, gant violonsoù, telenn. Kaer-meurbet eo bet. Ar vretoneg n'int ket tud distar.

Met setu ar glao da goueza e-pad an noz, ha gant ar sadorn mintin, kement ha ma c'helle. Ma padfe ! N'eo ket padet, nemet beurevez ar Sadorn. Netra, gant an noz e oa sec'h pep tra. Ar beurevez-se a oa gouestlet da gudem an Divroerezh : daoust hag e flier, evit mat ar feiz, harpan ar Vretoned divroet da virout o broadelezh, o spered a Vretoned, pe klask en enep o lakaat da deuzi e-touez ar C'hallaoued all an abreta ar gwella. D'ar veleien a ra war dro ar Vretoned divroet e oa da respont. A-du int a grenn evit ma vo klasket mirout ar muia ar gwella, o broadelezh gant ar re aet d'ar broioù kreic'h. Tud helavar eo hon beleien : sonet kreisteiz e kinnigent c'hoaz chom aze da gaozeal betek...

Tud helavar eo hon beleien. Pa lavaren deoc'h. D'abardaez hon eus bet an ao. Chaloni Saliou diwar-benn Sant Erwan. Leun-chouk ar sal er wech-mañ. Ha ne skuize ket an dud, nag ar prezeger kennebeut all. Un dudi ! Buhez Sant Erwan emezañ, n'eo ket kontou diwar skaññ ; n'eus ket kalz a dra a vefe istor diazezet muioc'h. Hag ouspenn-se, pebez buhez ! Pebez den !

D'an noz, war blasenn an Iliz-veur eo Sant Erwan adarre. Goude kanaouennoù kanet dimp gant bugale Skolaj Lannuon, eo taolennoù buhez Sant Erwan gant Jarl Priel : Tad Erwan Helouri o c'hortoz ganedigezh e vab, Erwan bugel, Erwan studier e Paris, Erwan advokad, Erwan beleg ha difenner o dud, betek e varo. Aet omp don dija en noz, setu maz a war-raok ar brosesion, ma treger ar c'hantik : *Nan eus ket en Breiz*, ma elum an dud o gouleier. Setu ma reomp endro war-du ar Minihi, war-du Sant Erwan evel ma lavarer e Bro Dreger, an hent bet pleustret gwechall gant ar Sant, pa zeue eus e di a Gervarzin betek Kêr. Setu ni eta war douar Sant Erwan, an iliz sklerijennet a-dal dimp, ha dirazomp an aoter uhel, savet e penn ar park, ma lid warni an ao. Baron an oferenn hanter-noz, en enor da Sant Erwan. Pemp mil a dud o pedi hag o kana, c'houec'h beleg o rei ar gomunion. An Aotrou Doue da glevo dre bedenn Sant Breiz, hor goulennoù war an douar !

Diou eur eo pa c'hellan distrei. Ha n'eo ket echu an traou. Araok oferenn bred ar sul eo ret pledi gant ar c'henstrivadegoù : kan, prezegerezh, lenn... Evit ar c'han eo bet graet araokadennoù souezus ; dreist-holl gant lazou-kana eskopti Kemper. Oferenn-bred da unnek eur, kanet gant an ao. Beleg, eskob Gwened. Gwellet em eus meur a hini a zo bet estlammet-naet gant kaerder ar c'han en Iliz-veur. Tud a estren-vro, tud nann-katoliked. Prezegenñ Dom Koliot ivez a zo bet kenañ, kenañ.

Goude kreisteiz e Park ar Sportou e oa an abadenn folkloerik : kanaouennoù, dañsoù gant ar C'helc'hiou keltiek, ar C'hevrennoù-biniou. Ur morad a dud ? Pet ? Moarvat, un ugent mil bennak. Nebeut a douristed, hervez gwelout. Met tud eus ar vro, eus Breiz a bez, a vil-vern. Hep kontañ ar pennoù bras deuet d'ar gouel. N'em eus ket c'hoaz komzet anezo : ha koulskoude tud a bouez hon eus bet. Ne gontan ket an Eskibien a zo, en eun doare bennak, eun dever dezo dont d'ar Bleun-Brug ; met d'ar gwener da noz, evit ar sonerezh, e oa Kornu, is-sekretour ar Gouarnamant d'an Arzou-kaer ; d'ar sadorn da noz ha d'ar sul, e oa ar ministr Pleven, en deus graet e ti-kêr, d'ar sul mintin, eur brezegenn leun a veuleudi evit Breiz ha renerien ar Bleun-Brug...

Evel ma vez graet pep bloaz, Bleun-Brug Landreger a oa ret debañ echuiñ gant eur brosesion vras : tost da gant strollad gant o bannielou, kroazioù, skeudennou Sant Erwan, o deus kemeret perz er brosesion-se. Dispar eo bet : an hini gaera bet betek-hen, ha koulskoude ret eo anzav e oa bet brao-meurbet hini Kastel. Goude, bennoz ar Sakramant war blasenn an Iliz-veur, ne oa ken kantik Sant Erwan, nemet levnezh.

Petra tennañ eus ar Bleun-Brug-mañ ? Evit tud Bro Dreger eo bet eun estlamm. Bleun-Brug Landreger e 1942, e pad ar brezel a oa bet eun dra distar. Evit kaout eur Bleun-Brug bras evito eo ret marteze mont betek hini Gwen-gamp, pell-mat. N'ouient ket, tamm ebet, petra c'helle beza eur Bleun-Brug bras. N'ouient ket kennebeut all, evit al lodenn vrasa, e vije bet e Breiz kement a wiskamanchou, a gelc'hiou keltiek, a c'hoarierien-biniou. Chomet int sabatu, kresket enno al lorc'h da veza Bretoned. Sant Erwan da lakay ivez en o c'halon ar c'hoant da labourat evit ar vro, d'ober anezi, eun tour-tan skedus, eur sklerijenn er bed.

Prezegenn an oferenn-noz e Sant Erwan

SETU-NI digouezet war douar sakr Sant Erwan, lec'h m'eo bet ganet seiz kantved a zo dija, lec'h m'en deus c'hoariet, bugel fur a dilu, lec'h m'eo bet marvet, beleg santel. Evit petra omp deut betek amañ en eur gana kantik patron bras Breiz Izel ? Moarvat, evit en em unani gantañ, heñ bremañ en neñvoù, ha ni amañ war an douar bet pleustret gant e dreid. Evit petra ? nemet evit lakaat hon meuleudi hag hon pedenn da sevel war-du ennañ ma roio dimp hon mennad. Peseurt mennad ? Hon silvidigezh, ha silvidigezh Breiz.

Sant Erwan a glev a'hanomp en sioulder an noz-mañ. Emañ tost, tost dimp. Ha setu amañ e respont : Kredi ! Pedi !

Kredi, rak neus mui ken a feiz e-touez an dud. Ne gredont ken en Doue, ne gredont ken e den ebet, ne gredont ken e tra ebet. Fellout a ra dezo mont diouz o fenn, hep derc'hel kont us netra, ha mont a reont d'an dizurz, d'al laerofisi, d'al lontegez, d'an diegi, d'an diroll. Ni ivez a zo klañv, Bretoned ! N'omp ket brein c'hoaz, met klañv omp koulskoude. Ha poent eo dimp paraa...

Kredi ! Kredi en Doue, kredi en Breiz. An eil tra a zo stag ouz egile. An neb na gred ken en e vro, a zo tost sur mat da chom ivez hep kredi e tra ebet. Kredomp eo Breiz ur vre santel a dleomp mirout en he c'haer, en he splannder, en he nerz : Hon bro, kristen a holl viskoaz, a zo bet diazezet gant hon sent koz evel Sant Tudual ; santelaet eo bet a-hed ar c'hantvejou gant tud evel Sant Erwan, Mikael an Noblez, an Tad Maner. Kredomp en hon bro, labouromp eviti : ma vije Sant Erwan bremañ war an douar, e vije ar Bleuñbruger kentañ. Heñ, goude beza desket latin ha galleg, n'eo ket chomet e Bro-C'hall, n'en deus ket kollet e amzer oc'h ober soupleseou dirak an dud vras ha pinvidik, met aet eo da rei sikour d'an dud dilezet, da vretonek e amzer, da brezeg dezo e brezonek, da rei dezo war eun dro bara ar c'horf hag an ene. Ha ni, kredomp ivez hon eus eul labour d'ober, labour bretoned an amzer a-vremañ, lakaat ene Breiz da splanna muioc'h, ene Breiz douget d'ar feiz, d'ar sperec, d'ar frankiz, d'ar wirionez, da Zoue. Muioc'h mui eo sklaer hon eus eur roll da c'hoari war leurenn ar bed, eo sklaer e c'houlenn ar bed eun dra bennak diganimp, ar pezh ez omp gallet gant an Aotrou da zegas, muioc'h a varzhoniezh, muioc'h a gaerder, trec'h an ene war an danvez.

Kredi, met ivez pedi.

Gwan eo hon feiz, gwan hon pedenn. N'eo ket hir, n'eo ket fonnus, n'eo ket nerzus. Pedi. N'ouzomp ket petra gouezo arc'hoaz warnomp. Trubuilhus eo red ar bed, eme hon Tad santel ar Pab. Ar brezel a c'heli dont adarre, marteze hep dale. Pedi ! Kement a chapelioù dirapar, dismantret, dre ar vro, tiez sakr lezet da goueza pe dija kouezet da vat hep na vefe den evit garmi d'an dud eo eun druez, eun torfed : eur chapel nebeutoc'h, eur pardon nebeutoc'h eo eun ti a bedenn, deveziou a bedenn rasket diwar hon douar, ha diwar bed an dud. Ene Breiz ivez a zo eur chapel santel lezet da goueza, daoust d'he c'haerder, daoust d'he braventez. Hon eneoù, Bretoned, n'int ken marteze, nemet chapelioù dismantret, rivinet ha dirapar, hep pedenn ken enno, hep tra breizek ken enno. Sant Erwan hizio a c'houlenn diganeoc'h labourat da adsevel Breiz, heñ hag a blij dezañ ober pelerinachou d'hon sent koz ; garmi a ra deoc'h ober adarre eus ho pro hag eus hoc'h eneoù, eun ti a bedenn.

A-us d'an dachenn-mañ, e hini, emañ Sant Erwan o veilha noz-deiz ; a-us da Vreiz emañ Sant Erwan, patron Breiz, o veilha noz-deiz ; emañ e zivrec'h a-us d'imp, emañ e vennoz warnomp, hag e gomzou a ziskenn e don hon ene. Komzou a sklerijenn en noz : Kredi ! Pedi ! Evelse bezet graet.

Maodez Glanndour.



En eskibien o sellet ouz an abadenn folklorek.
En o 'zouez, an Tad Colliot (an trede).

PHOTO JOS LE DOARÉ

WAR BONT LANDREGER

Evnig Penn-ar-C'hoad.



I

Eun deiz, war bont Landreger,
 Oan o vale dibreder,
 Merc'h-he-mamm am eus kavet
 Direi dira landeritra,
 O ouelan glac'haret
 Direi dira erou lanla.

II

Outi neuze c'houlennañ
 Petra ra d'ezi gouelañ :
 « Kouezet eo va gwalenn aour
 Direi dira landeritra,
 Er mor aze mab paour,
 Direi dira erou lanla ! »

IV

Vit ar gentan plonjadenn,
 En deus gwelet ar walenn ;
 Ha, d'an eil outi stoket
 Direi dira landeritra,
 Met n'eo ket distroet,
 Direi dira erou lanla !

III

Ma tapan da walennig,
 Petra am bo paotrezig ?
 « Me roio d'it va mignon,
 Direi dira landeritra,
 Eur pok ha va c'halon,
 Direi dira erou lanla ! »

V

Eun deiz, war bont Landreger,
 Oan o vale dibreder,
 Eur vamm-baour am eus kavet,
 Direi dira landeritra,
 O ouelan glac'haret
 Direi dira erou lanla !

Kastell-Aodren, 16 a viz Mae 1952.

EVNIG PENN-AR-C'HOAD.

A-dreuz va sonjou e skeud ar manati

EUR manati sioul, pell diouz trouz bouzarus ar bed, e-kreiz ar glaster, d'an diskar-amzer, war zouar benniget Breiz-Izel.

Pep tra amañ a zo eun dudi : dudi d'an daoulagad, dudi d'ar galon, dudi d'ar spered...

Amañ eo emañ, e gwirionez, ar peoc'h gwirion war an douar.
Tridal a ran... sonjal ivez.

A-hed an deiz e pourmenan dre ar manati, penn-da-benn d'ar balliou, eus ar chapel d'ar vered, eus ar vered d'ar chapel.

Mont a ran a-dreuz ar parkou, ar prajou, ar c'hoajou... Selaou a ran an turzunelled o c'hrougousat e beg ar gwez glas ; gwelout a ran ar gwinvered (1) mibin, o lammat skañv war ar bodou kistin, hag ar c'honikled (2) rouz o c'hoari patati dindan ar c'helen hag an drez e-mesk an deliou kousezet.

Gourvez am eus graet dindan ar gwez bras, war ar c'hinvi moug, flour 'vel voulouz, ha selaou... selaou ha sellet pell hag hir tro-dro d'in...

Barzonius pep tra ! A zloc'h va fenn, evel tonnou ar mor, ar skourrou uhel a zo hejet dihejet gant an avel, a voud, a froum en deliou, evel tarziou war ar reier garo.

A-bep tu, bannou alaouret an heol, livet-dislivet gant deliou melenet an diskar-amzer, a c'hoari dindan skeud ar c'hoadeg. Hada a reont dre holl, a-verniou, takadouigou sklerijenn, a weler enno o c'hournijal, evel balafen-ned (3), deliennou gwenet o kouseza diouz ar bleñchou uhel.

Ar c'hoadeg en e bez, gant kefiou hir ar gwez bras, a zo evidoun evel eun iliz-veur divent, ar volz anezi, glas ha finvus. An avel o voudal er skourrou a zeu d'in da veza, evel mouez eun ograou ramzel (4) o vont en-dro dindan bizied galloudus ar C'hrouer.

Baleet em eus dre ar flourennou d'ar mintiniou gleb, ha gwelet ar gliz o lintra evel perlezennou ouz begou ar geot glas, perlezennou hag a zo d'in evel ar grasou kaer a lintra war an eneoù santel.

Hedet em eus ar steriou, a-hed an traoñiennou, hag huñvreet em eus en eur glevet hiboudig an dour stivell, war ar bili hag ar grouan, hag o vont d'en em goll war-zu ar mor bras.

Hag em eus sonjet an eneoù a zeu d'an ti-mañ d'en em walc'hi diouz lous-toni ar pec'hed, e dour sakr ar binijenn, hag a bella dioutañ, marteze, 'vit 'n em gailhara a-nevez e fankigell ar bed. Na pegen gwan an den ! Na pegen bresk e galon ! Na pegen dister e feiz !

Gwelet em eus ar venec'h, war o daoulin o tiframma al louzeier fall, eus al liorzou labourer. Ha ne dlefeomp ket, ni ivez, mont war hon daoulin, vit diframma diouz hon ene, ar plegou fall a venn mouda ennañ ar vertuziou santel ?

Bet oun, e disheol ar gwez avalou, o skourrou d'ezo pleged betek ar geot druz, dindan bec'h o frouez melen-darev.

Salo d'hon ene e touge kemend-all a frouez pa zeuio Doue d'e eur, d'hor c'hutuilh eus ar bed-mañ.

Meur a wech oun bet azezet e bered vihan ar manati, e skeud ar groaz vras dindan ar gwez teñval, dirazoun ar c'hroaziouigou koad, warno anolou ar venec'h aet da anaoun. Emañ aze o c'horfou o tiskuiza, dindan eur gwiskadig douar, hag eun nebeudig bodou beuz. Dilufr ha dilorc'h er vuhez, emaint ken dilorc'h all e rouantelez ar vered.

Eur gentel a izelegez evidomp, pennou lorc'hek, ha ne glaskomp nemet sach warnomp evez an dud, an dud vras eus ar bed. Dizale, koulskoude, e kouskimp ivez hor c'houisk diweza en eur vered bennak, ha n'eo ket eur bez lorc'hus ha pinvidik eo a raio hon digoll hag hon eürusted er bed all.

(1) Kaz-koad (écureuil).

(2) Al lapined.

(3) Des papillons.

(4) Bras-kenañ.

Kambrig ar manati ; peder moger wenn hag eur prenestr bihan ; eun daol hag eur gador ; kinkladur ebet, eur groaz hepken : setu va c'hambr d'in. Eur gambr sioul, ma kiever anezi ar venec'h o kanmeuli Doue er chapel, an avel o voudal e bodou ar gwez, hag ar glao ingal o kouseza, o sklakata war gweren-nou ar prenestr. Ingall, ingal e kousez ar glao dibaouez, eus an oabl koumoulek, teñval.

Ar pec'hed ivez a ra d'an eneoù beza teñval ; teñval 'vel ar c'houmoul du. Ra gouezo diouto, evel ma kousez ar glao, keuz ha glac'har, hag e tec'h diwarno an deñvalijenn evel ma tec'h ar c'houmoul du warlec'h ar glao.

Ar glao ingal a gouez, dibaouez, chom a rankin prizoniet em c'hambr, va unan, hep gellout mont er-maez.

« Pa fello d'eoc'h ober pinijenn, eme Jezuz, it en ho kambr, serrit warnoc'h an nor, ha Doue hag a wel pep tra, a vezo plijet gant ho pedennou hag ho pinijennou. »

Bennoz Doue d'ar glao, a ra d'in heulia gwelloc'h an Avel. Bez' ez eo evel eur voger a laka disparti etrezoun hag ar bed. Bennoz Doue d'ar glao !

Emañ kousezet an noz, an noz du, an noz dall, war ar manati.

Ar venec'h, en amc'houlou ar chapel, a gan ar c'homplidou, diweza peder-nou an deiz maro.

O skeudou, gant goulaouig ar sakramant, a gresk, a gresk, a zebant en em zibrada, a sav war-zu an neñv da heul o moueziou flour.

An Tad Abad, o venniga e vugale stouet o kana ar « Miserere » a-barz mont da ziskuiza, o zo eun daolenn Baradozel : taolenn a garantez en eur bed brein a gasonl.

Emañ an noz o ren, an noz du, an noz dall, an noz mut.

Tavet eo an avel, kousket eo an dud. Sioul eo pep tra.

Hag emaoñ war-sao e-kreiz an noz, an noz du, an noz dall, an noz mut.

Hag em eus kanet gant ar venec'h e-kreiz an noz.

Hor moueziou o deus tregerniet e-kreiz an noz sioul, e chapel ar manati.

Kanet hon eus e-kreiz an noz, e sioulder an noz, p' emañ kousket pep tra.

Kanet hon eus a-greiz kalon, bennoz, meuleudi ; doujañs ha karantez d'Hor C'hrouer, Mestr Galloudus an Neñv hag an douar, an traou a weler hag an traou na weler ket.

Ha war skoazell hon dic'halloud, hon eus galvet an holl grouadurien :

Stered diniver an oabl divent, Loar, rouanez an noz, Heol benniget an neñv, Mor sioul ha mor diroll, Menezioù erc'hek ha skornek, traoñiennou glas, steriou a bep ment, plaenennou ha traezennoù, koajeier ha prajeier, loened-red ha loened-stlej, Laboused a nij, pesked a neuñv... Avel ha glao, erc'h ha skorn, yenijenn ha tommder, amzer vras ha gwall-amzer...

Bennoz, meuleudi, karantez, d'hon Doue-Meur ha peurvad, Krouer ha Mestr galloudus pep tra.

Tavet eo hor c'han. Ne weler er chapel nemet ar goulaouig hepken, dirak ar Sakramant meulet ra vezo. Emañ ar manati a-bez o tiskuiza. Beuzet eo en deñvalijenn. An noz a ren dre holl, an noz du, an noz dall, an noz mut.

Laouenanig Breiz.



Burzud Sant Efflamm

EN nozvez-se, gwenn kann oa an douar gant an ere'h e Kerne-Veur. Ar chas o-unan a chome sioul en o logou ha den n'en dije kredet mont en hent dindan eur seurt amzer.

Kleved a raed koulskoude trouz eun den o chacha e dreid gantan hag o sank a anezo doun en ere'h tro ha dro. Liou an anken warnan e selle a bep tu o klask ar gêriadennig m'edo o vont betek enni.

Efflamm, mab eun denjentil, en doa, nevez 'zo, klevet Aviel an Aotrou-Krist ha raktal oa diwannet ennan ar youl da skigna ar wir feiz dre ar vro. Hep marc'hata, hep aon rak an amzer yud oa aet en hent.

A-greiz holl, setu ma wel eur goulaouig o lugerni, eur goulaouig a luskelle evel an hini a staged ouz kerniel ar saout e bro ar benseerien.

Dont a rae ar sklerijenn eus eur vilin-avel goz, hanter gouezet en he foull hag a save he mogerioù dismantret en oabl evel eun dorn o tiskouez an nenv. Piou a c'helle beza eno ?

Piou ?... Tri aihon falli, tri laer bras a rae o micher skarza sier an dremeridi ha goueledidi al listri-mor. Tri zen n'helle nag an druez, nag ar spont kaout krog en o eneou.

Efflamm a sko war an nor. Digeri a ra dioustu. En e sav war an treust e tistag a vouez uhel :

— « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! Doue r'o sikouro ! »

Krabanoù a gouez warnan kerkent ; liammet eo, stlapet d'an douar. Ar mestr a furch e sac'h. Mab al lord n'eo ket gwall binvidik : eur c'hreun bara sec'h, eur c'hinaouad fourmaj !... Ha ! Setu eun dra bennak all : Goloet mat gant eur c'hroc'hen danvad, eul levr gant skeudennou eus ar re gaera, an Aviel, buhez Hor Salver Jezuz-Krist.

Al laer ne oar ket lenn. Ar skeudennou avat a sebez anezan. Gant e vizied e tro hag e tistro ar parchennou alaouret. Chom a ra bamet dirak skeudenn Hor Salver o vale war an dour. Bag an ebestel a blege d'an tonnou-mor evel ar goelan o stoui war gern an tarz. Sant Per o veuzi, o vont d'ar strad hag oc'h astenn e zaouarn d'an Aotrou-Krist. Traou evel-se a anaveze mat al laer boaz da bensea.

An den-se avat a chome e dreid a-us d'an dour, a c'houre'hemenne d'ar mor, piou oa, petra 'verke ?

— « Petra an imaj-se, eme al laer ? »

— « Respont a rin d'it pa 'z pezo disliammet ac'hanon, a lavar raktal ar paotr yaouank. »

Mantret e chom al laer, kustum da glevet nemetken garmou ha gouelvan.

— Piou out, emezan, evit bragal evelse dirazon ? »

— « Kannad Roue an nenv hag an douar, eme Efflamm en eur vouse'hoarzin. »

Briz-c'hoarzin eo a reas ar forbann.

— « Kredi a res sponta ac'hanon ? N'eus roue all aman nemedon. »

— « Galloud ebet dit warnon nemet an hini lezet ganez gant va Roue. Ha gouzout a ra evel ma kar blenia katonou an dud koulz ha ma oar gouarn an avelaj hag ar mor. Her gwelet a rez war an imaj a zo dirazout. »

Daoulagad an den a gouez a-nevez war al levr, daoulagad a oar toulla ar brumenn, al lатар hag ar gwall-amzerioù. Sellet a ra endro ouz ar paotr yaouank.

— « Da hardisegez a blij din. Komz a rez avat evel eur penn skanv. Piou a c'hell beza mestr d'ar mor dirollet ? Disliammet e vezi. Arabat dit kredi evit-se e c'helli tec'het kuit. Lavar din nemetken piou an hini a zo aze o vale war an dour. »

— « Va Roue eo, eme Efflamm, o tont da azeza e kichen al laer evel m'en dije graet e ti e dad. » Hag e tisplegas dezan ar pezh a c'hoarvezas neuze.

— « Gaouiad, eme al laer. Den na c'hell ober eur seurt burzud. »

— « Va Doue en deus her graet koulskoude. »

— « Gaouiad ! N'eus penn foll ebet evit kredi da gomzou. Te da-unan... »

— « Kredi a ran a-greiz va c'halon ha rei a rafen va buhez evit va feiz ! » Sioul e chomas an dud eur pennad... Ha mestr al laeron da lavaret :

— « Mat eo. Paket e vezi en da c'her. M'en deus da vestr savetaet Per eus ar mor, e c'hell ive savetei ac'hanout emichañs ? »

— « Ya. Ma plij gantan. »

— « Gwelloc'h-gwella. Mont a rafes war ar mor a welez aze dirazout en eur vag hep gouel na roenv, en eur vag a roin dit hag a vezo maen ar vilin-man ?... Ma teu d'az Roue, emezan c'hoaz en eur c'hoarz yud, da savetei ac'hanout, e teskin da relijion hag oc'h heulin anezi. Digemeret a rez ar c'hlaouestre ? »

— « Ya ! Mont a rin war da vag. Maro pe veo, den n'am distago diouz va Doue. Pe e kaso ac'hanon d'eur porz war an douar, pe da borz ar baradoz, dindan e veli e vezin atao. »

Toulla a reas an deiz. Ar maen-milin a voe diskennet war ribl an dour hag Efflamm a lammas warnan.

— « Ra zeuio Doue, emezan, d'am blenia betek ar porz ha ra lakay ac'hanoc'h da vont eun deiz en Iliz santel. »

Eur vountadenn nerzus a-berz al laeron hag eman ar maen en dour.

Evel ma pleg ar-vag dindan ar gouel pa sko war-zu an uhel-vor, ar maen a grogas da heulia ar gwagennoù diwar c'horre o kas ar paotr yaouank. Eur c'hantik a levezas a savas warnan...

Strafuihet holl al laeron a gouezas d'an daoulin.

Ar vag, loc'het a Gerne-Veur, a zouaras war aodou Breiz, tost da Blistin. Dizale e savas eno ar bedenn hag e touez ar genta kristenien e c'helled gwelet an tri forbann deut da Zoue.

(Diwar eur gontadenn goz.)

Yann Tranvouez.



KENSTRIVADEGOU AR BLEUN-BRUG

War vrasaat ez a bep bloaz niver ar genstriverien. War ar poent-se dreist-holl, e weler peseurt mad eo bet kroui ar Bleun-Brugou, anvet « bihan »... hag a zo bet bras daoust d'o ano.

100 bugel o deus kenstrivet er Pont, 200 e Plougerne, 30 e Baod hag eur c'hantad e Landreger. D'ar Bleun-Brug bras e oa deut bugale Bro-Dreger (Priel, Pleuveur-Gaoter, Ploubêr, Groñvel...) hag an darn vrasa eus prizioù kenta Bro-Gerne ha Bro-Leon, gant unan bennak all ouspenn. (Meuleudi d'ar familhou ar Beg (Kemper) ha Maze (Rouen) o deus lakaet o bugale da gens-triva !) Start eo bet ar c'hrogad 'ta, mat-tre eur c'halz eus an notennou. Ha gwall souezet ar varnerien (Tregeriz eun darn vat anezo), o welout pegen distagellet mat e oa ar vugale-se o tont eus pevar c'horn Breiz ha zoken eus pelloc'h. Setu amañ roll ar prizioù kenta :

TRESEREZ. — K. ar Brun, Kastell-Paol ; H. Kaouissin, Fontenay-aux-Roses ; Y. an Dour, Santez-Anna-Wened.

DISPLEGEREZ. — M. ar C'horr, Follgoad (Leon), P. Kerveillant, Landudeg (Kerne) ; A. Jeron, Tremargat (Treger), H. Kerloc'h, Landudeg (K) ; A. ar Gov, Pouldregad (K) ; Y. Celton, Treboul (K).

LENN. — M. ar C'horr, Follgoad (L.), P. Kerveillant, Landudeg (K) ; A. ar Pab, Ploubêr (T.), H. Kerloc'h, Landudeg (K.) ; M.-T. Celton, Pouldregad (K), Erw. Balanant, Kleder (L.).

KAN. — Ir. Morvan, Lanniliz (L.) ; A. Jeron, Tremargat (T.), A. Berlivet, Treboul (K.) ; K. Allenou, Groñvel (T.), G. ar Rouz, Groñvel (T.).

Bugale Bro-Wened a zo degouezet re zivezat e Landreger evit gellout kenstriva.

Aet 'z eus 'ta 3 skeudennig Sant-Erwan da Vro-Leon, 8 da Vro-Gerne ha 5 (3 evit ar c'han) a zo chomet e Bro-Dreger. Ouspenn, ez eus bet roet, evel prizioù, eun 50 levr bennak.

Prezegerez, Rimadellou, Kan Pobl.

Prezeger ebet eus Bro-Gerne nag eus Bro-Dreger. Holl e teuent eus Lanniliz (L.) pe eus Branderion (Gwened). Ne oa nemet eur paotr yaouank : Job ar C'horr, eus Lanniliz. Ar c'henta priz (merc'hed) a zo aet gant J. Hirgair, eus Branderion.

Daou genta rampo evit ar rimadellou (paotred) : Stan. Nicol eus Landreger ha L. ar Gov eus Pouldregad. Ne oa nemet eur plac'h yaouank : M.-L. Kabon, eus Lanniliz.

Ar gwella kaner eo bet Gloagen, eus Konforz (K.), hag en deus kanet « Merc'hed Breiz-Izel » ; E. Pronost, eus Lesneven (L.), gant « Ar gwiniz gwenn », he deus bet ar gwella notenn.

Meuleudi d'an holl re o deus labouret evit kenstrivadegoù ar Bleun-Brug. Bennoz Doue d'ar vistri-skol ha d'ar gerent o deus lakaet o bugale da gens-triva, d'ar varnerien (lod anezo eus a-bell), ha d'ar re o deus bet ar vadelez da sikour ar Bleun-Brug evit ma c'hellfe kinnig prizioù kaer d'ar genstriverien.

Echu Bleun-Brugou 1952. Ra vo kaeroc'h c'hoaz re 1953. Adalek bremañ sonjit petra a c'hellot ober. Eun dra a c'hellit ober dioustu : deski lenn brezoneg d'ar vugale, re ho familh, re ho skol. C'hoant ar Bleun-Brug a zo rei eun dalvoudegezh brasoc'h-brasa da genstrivadeg al lenn. N'eo ket sur an hini a denn ar muia sellou an dud, met an hini frouezusa eo evit dazont hor yez.

Bec'h d'al labour hag ar maout d'ar re wella !

K. Riou — 18-VIII-52.



Gounezet o deus ar priz kenta.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Kenstrivadeg al lazou-kana

Teir mouez disheñvel.

Kenta : Noyal-Pondi (Morbihan). — Eil : Etel (Morbihan), Gourlizon Finist.). — Trede : Branderion (Morbihan). — 4. Gregam (Morbihan). — 5. Pluvigner (Morbihan).

Teir mouez heñvel.

1. Y. K. A. M. Lannuon (plac'hed yaouank).
2. Y. K. A. M. Plouzeniel (paotred yaouank).
3. Skoutezed Kistreberc'h (Morbihan).

Peder mouez disheñvel B.

1. Plistin (C.-du-N.) — 2. Plougerne (Finist.). — 3. Gwened-Trussac (Morbihan). — 4. Penvenan (C.-du-N.). — 5. Bruz (Il-ha-Gwilen). — 6. Bégard (C.-du-N.).

Peder mouez disheñvel A.

1. Sant-Vaze Kemper ha Landivizio (Finist.). — 2. Landreger (C.-du-N.).
3. Plouzeniel (Finist.). — 4. Pempoul (C.-du-N.).

Piou ar fina ?

O LIER a zo eur c'hilhog (c'hog) savet mat. Er skoliou uhel eo bet, e re uhela rouantelezh ar glud. Ouspenn skiant-prenet en deus... da werza da holl gilheien (gejer) Breiz ha tro-war-dro zoken. Klipenn en deus evel eun tamm heol mintin ; par eo e lost da blu tog Henri IV, pe dost ! Pintet war e ellou, feson gaer a zo gantañ, heñ roue bras porz yer Kerstridig. Ha



pebez kaner ! Dihuni 'ra holl vugale kêr (hag ez eus anezo), hag o zadou hag o mammou, ar vistri hag ar vevelien, loened ar c'hraou hag ar marchosi. Betek Kerbolu, Keruhel ha Ti-war-lenn, e kiever e vouez skiltrus ha laouen.

Alanig al louarn a wel alies ar c'hilhog

kaer ; laouen bras e vefe ma c'hellfe paka anezañ. Met penaos tostaat outañ ? penaos dont a-benn da sank a zent louarn marnaoniet e kig Olier ? Diou pe deir gwech dija en deus c'houitet war e daol.

Goude furchal mat en e sac'h-troiu e teu war-du Kerstridig. Emañ Olier er park kerc'h, tost d'ar c'hae, o klask greun war an douar. Pêr ha Yann a zo o tastum an drammmou hag emañ ar beurzourn diweza. Tamm eo dezo bremaik.

A-raok d'ar c'hilhog gouzout netra, emañ Alanig peg e paoliou Olier. Hemañ en em zifret, e ziwaskell a sko start ouz penn al louarn, hanter-dallet gant an taoliou. Met Alanig a stard e zent. Youc'hadennoù ar yêr pennfollet a laka Pêr ha Yann da sellout. « O, eme Bêr, tapet eo ganez en taol-mañ, Alanig ! Bramañ c'hellin kousket va c'hoant. » Alanig ne chom ket da selaou gourc'hemennoù. Forc'h an daou zen n'en deus c'hoant ebet d'he santout war e gein. Ar buana ma c'hell e tec'h etrezek ar c'hae. (N'eo ket aes gant an tamm kilhog brein-se a zispac'h 'vel eur diaoul er pinsin !)



Spered Olier a labour ivez : poent bras eo ! « Lavar dezo, emezañ, ne zell ket an dra-ze outo ! » Ken badaouet eo penn Alanig m'en em zistro dioustu war-du Pêr : « An dra-ze ne zell ket ouzoc'h », emezañ en eur zigeri frank e e c'henou. Kerkent e nij Olier war skourr eur wezenn-avalou. Alanig

a lamm. Ne dap nemet eur skourrig izel hag eun aval prefivedet a gouez war fri al loen lostek. Ha klevout 'ra c'hoarzennoù goapaus Pêr ha Yann.

« O va mignon Olier, eun taol farserez eo a glasken c'hoari dit ! Ya, eur c'hoari hepken ! » — O Farserez ha farserez a zo ! Me ivez em eus komprenet an dra-ze dioustu. Kenavo, echu ar c'hoari. Peurzourn a zo fenoz ; ret din kana kreñv ware'hoaz evit dihuni Pêr ha Yann ! Ko-ko-ko-gog ! »

K. Riou.

KORN AL LIZIRI

Aklavik, N. M. C. - Northern Canada

Je ne saurais trop vous exprimer mon appréciation pour votre revue. Elle est doublement la bienvenue chez les Bretons qui sont venus porter l'Evangile au bout du monde.

Le croiriez-vous, et c'est pourtant un fait que le breton et l'esquimaud ont beaucoup d'affinité : je parle de la langue, et même de la musique. Les airs de chez nous trouvent un écho chez nos mangeurs de cru ; et c'est pour cela qu'en préparant un livre de prières et de cantiques en esquimaud, j'ai cru devoir choisir quelques-uns des airs de cantiques bretons, si beaux et si pieux dans leur simplicité. Ça fait déjà deux ans que j'ai commencé à faire chanter à notre petite chorale plusieurs cantiques esquimaux sur l'air de *Patronez dous ar Folgoat* et *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz* ; ceci au cours d'une émission radiophonique qui porte tous les dimanches soirs à nos pauvres gens de la Terre Stérile, la parole de Dieu dans leur propre langue. Dans quelques mois nous espérons voir sortir notre livre de prières et de cantiques, qui, lui, contient une dizaine de cantiques sur les airs de Bretagne. Ainsi les chapeles, les masures et les iglous des pays des Esquimaux feront écho aux beaux pardons dont nous gardons la nostalgie.

J. L'Helgouac'h.

Roit anioù Brezonek d'ho kezeg !

ER bloaz-mañ c'hoaz, ar c'hezeg breizek o deus graet berz souezus e Kenstri-vadeg bras Paris. Dedennet o deus eur maread tud bamet gant o c'haerded hag o nerz. Kezeg Breiz a zo bremañ brudet dre ar bed holl. Met peseurt anioù a zo gant al loened dispar-se ? Moarvat anioù eus o bro, 'vit ma ouezo dioustu an estrenien eus pelec'h e teuont... Siouaz ! Peurvuiañ n'eus ganto nemet anioù gallek, pezh 'zo eur vez ruz hag eur rangalon evidomp.

Gwelit bodadegoù evel hini Kallag n'eus ket pell. Bodet a oa aze tost da gant kazeg, tri, daou pe eur bloaz, lizerennet eta F.G.H. Faltazi o ferc'henned ne seblant ket bezañ bras ; n'o deus ket klasket pelloc'h eget Fauvette, Gamine, pe Huitaine ! Ano brezonek ebet n'am eus kavet e bodadegoù Kallag, Boulviag ha Gwengamp, unan pe zaoù hepken e Rostren. Tadou an ebeulezed-se a zouge c'hoaz anioù brezonek alies awalc'h. Daoust hag e vefe kollet gant hor mage-rien-gezek pep lorc'h ha pep ijin ?

E penn kentañ pep bloaz, e tlefe Bleun Brug embann anioù brezonek, aes ha berr, a kregi gant lizerenn ar bloaz. Bretoned, roit eun ano brezonek d'ho kezeg ! Er bloaz-mañ : Ijin, Ilio, Ilin, Illur, Imor, Inkane, Ingal, Irien, Irinenn, Ivin, Iskis, Irmich, Irvin, Islonk, Istrogell, Itrik, Iwerzon (Irlande), Itron, Ispisial... ha me 'oar !

Er bloaz a zeu : Jabadao, Jenoflenn, Jao, Jed, Jesami, Jiboez, Jilgamm, Joa, Joaus, Julod, Jelvestr, Jerman, Jakez, Jubenn, Jubennour, Jalm, Jermon, Jelkenn. Tu a zo da astenn ar roll...

Benead.

SKOUER TIGNES

An holl o deus klevet ano eus ar barrez-se a zo bet kement a gaoz diwar he fenn war ar c'hazetennou. Tignes a oa eur gêriadenn a 500 den, en eun draonienn sioul ha kaer eus ar Savoie. Kondaonet eo bet da veza beuzet, tiez ha douarou, en eul lenn vras savet en draonienn evit ober elektrisite.

Tud Tignes, daoust ma'z eus bet roet arc'hant d'ezo evit o digoll eus an tiez hag an douarou a gollent evelse, o deus en em zifretet evit ma ne vefe ket beuzet o farrez. Kaer o deus bet sevel klemm, avat, hag ober goulennoù ouz ar gouarnamant, n'int ket bet selaouet, ha ret eo bet d'ezo mont kuit, en eur lezel war o lerc'h o farrez da veza lonket gant al lenn.

N'eo ket arc'hant a gollent, peogwir e oa kinniget da hep hini anezo muioc'h eget n'en doa araok. Koulskoude o deus en em zifennet start, o veza eur skouer evit an holl, o soñjal e vefent selaouet 'benn ar fin, hag e vije lezet o farrez dezo. M'o deus en em zifennet ken start, e oa dre ma ouient ne vefe digoll ebet evit ar pep gwella eus pezh a gollent : ar barrez, ha kement tra prizius a zo dindan ar ger-se : ar gevredigez tud bodet er memes korn-bro, en dro d'ar memes iliz, gant ar memes gizioù, an eil oc'h anavezout mat egile, eur strollad tiegeziou bodet en dro da memes poanion ha da memes laouene-digeziou ar vuhez pemdeziek. Hag hiviziken e vije ret d'ezo tec'hout pep hini eus e du, evel tud argaset, kollet ganto ar pezh a gurent ar muia : beva e peoc'h asambles. Evel ma lavarent, evit ober arc'hant edod o vont da laza eur barrez. Eun taol ouspenn e-touez gwall-daolioù an « araokaat », ar « Progrès ». An danvez atao kenver lec'h ar spered er sevenadurez a-vremañ.

Emzifenn kalonek parrezioniz Tignes a zo eur skouer evidomp-ni Bretoned. E riskl emamp-ni avat da goll kalz muioc'h eget n'o deus kollet an dud-se. Abaoe dekvloaziadoù ha dekvloaziadoù e klasker diskar sevenadur hor Breiz, en ano ar « Progrès » (evel ma lavarer evit digarezi an oberou fallakr). Klasket ez eus bet diskar hor feiz, hor yez, hor gizioù, hon doareoù beva, hor spered broadel, ha deuet eur a-benn, siwaz, e meur a feson. A drugarez Doue, ar Vretoned n'int ket chomet mut na difiñv, hag anzav a c'heller n'eo ket bet kollet ar boan. N'eus nemet sellout en dro deomp, ha soñjal er pezh a zo bet graet ha savet, diwar dismantrou a c'heller lavarout. Ne welimp ket kalz a dra marteze, met awalc'h evelato evit gouzout e kresk adarre spered ar Vro awalc'h evit kaout fiziañ ha kalon da labourat. Kalz a hent a chom c'hoaz da ober evit savetei hor yez hag hor sevenadurez, evit savetei buhez Vreiz, met, e gwirionez, eur vro n'he deus morse echu da stourm evit he buhez, pa n'eo ar vuhez nemet eur stourm pemdeziek. Er stourm hag el labour emañ ar vuhez.

Hag enor eur vro eo dere'hel d'an traou fiziet enni gant Doue.

Melar.

AN DEN GOUIZIEK HAG AN DEN FUR

Eun den gouziek a dreuze eur ster ledan en eur vagig : ar martolod a roeñve.

— Hag anaout a rez an istor, eme an doktor d'ar martolod ?

— Nann.

— Mat neuze ec'h eus kollet an hanter eus da vuhez. Anaout a rez da vihana ar c'halkul ?

— Nann.

— Mat neuze ec'h eus kollet an diou drederenn eus da vuhez.

N'en doa ket echu mat e c'her, m'edo ar vagig war he ginou, tumpet gant eun taol avel.

— Neuñv a ouzout, eme ar martolod d'an doktor ?

— Nann.

— Mat, neuze ec'h eus kollet da vuhez.

— Gouzout a rez da vihana da akt a gontrision ?

— Nann.

— Mat, neuze ec'h eus kollet da eternite...

Deskadurez a zo mat. Feiz ha deskadurez kristen eo ar gwella, rak abred pe ziwezal, mervel 'zo ret !

(Diwar Kannadig Landi.)

EDON HEP LOJEIZ...

U NAN eus kudennou ankeniusa hon amzer eo stad ar familhoad a zo hep lojeiz, pe e lojeiz fall. Er c'heriou koulz ha war ar mêz o c'haver stank. Aes eo da hep hini gwelout en-dro d'ezan traou glac'harus.

Nag a dud yaouank ne c'hellont ket dimezi, dre ma ne gavont na ti nag ôz.

Ped ha ped a zo dimezet, ha n'o deus nemet eur c'hoz tamm toullig kambr ha ne ouezont ket pelec'h e lakint zoken eur c'havel.

Ped ha ped all a zo dindan an toennou, en eur c'hignol gant tri ha pevar a vugaligou.

N'eus ket gwall bellou, eun Tad hag a zo boaz da brezeg da zul, er pell-gomzer, an *Tad Avril*, en deus skoet kalet war an dud mat war o meno, hag a zarr o daoulagad ouz ar vizer hag an dienez a ren en-dro d'ezo.

E gomzou hag a lakomp eul lodenn anezo amañ, a strak evel kurun :

« Ne dalvesfe da netra d'eomp truezi war di bihan Nazareth ma sarrfemp hon daoulagad hag hor c'halon ouz stad mantrus eleiz a familhou hag a zo, e gwirionez, hep ti nag ôz hag a stlej, abalamour da se, eur vuhez reuzeudik. Kudenn al lojeiz eo, hep mar ebet, ar gwasa eus kudennou an amzer vremañ.

« Hogen ret eo lavaret, hag aslavaret, ez eo ar reuzeudigez-se eur vez evit an dud a vev hirio. Rak gant eun nebeudig bolontez vat, o kompren ervat, nemet ken, e tleer en em zikour etre tud — hep spered kristen — e ve gallet aes awalc'h chench doare d'an traou.

« E-kichen an dienez a weler, eus eur c'hostez, nag a diez bras goulo, pe hanter c'houlo, ne gaver ket eus eur c'hostez all.

« Diskuliet am eus meur a hini hag a lavar beza kristen, pe a gred, da vihana, beza kristen, evit diskouez pegen nebeut emañ o oberou a unan gant o c'hredennou. Ha pegwir e komzan dreist pep tra d'ar gristenien e karfen rei d'ezo da gompren n'ez eus, ha ne c'hell beza pedenn, nag oberenn a zevo-sion ebet hag a c'hellfe plijout da Zoue, ma lezer a-gostez deveriou kenta ar garantez evit an nesa.

« Ma'z eus unan bennak hag en deus madou an douar, a lavar d'eomp Sant Yann, hag a wel e Vreur en dienez, hag a zarr outañ e galon, penaos karantez Doue a c'hellfe chom ennañ ? »

« En em harpa a reer war al lezennou, met n'eus lezenn just ebet hag a c'hellfe lakaat gwir ar perc'henn da dremen araok gwir ar vuhez.

« Ar youl dastum a zo penn abeg alies eus an dizurziou-se : karantez an arc'hant eo a zizec'h ar muia ar galon, ar pezh zo ar muia enep ar garantez dleet d'an nesa.

« Ret eo heja ar re o defe c'hoant kousket. Hag ar gatoliked a dlfe beza, er penn araok, evit digas gwellaen war ar poent-se, en-dro d'ezo. N'eo ket posubl d'ezo chom dizeblant dirak poanion ar re a zo bet laketa en o c'hichen gant Providans Doue hag o deus ezomm eus o zikour. I eo a zo o nesa, e gwirionez. »

Ra glevo bremañ ar re o deus diskouarn, evit ma c'hellint klevet diwezatoch mouez Hor Salver o lavaret d'ezo :


« Edon hep lojeiz ha c'houi ho peus roet repu d'in... ».

L. B.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER IMP. CORNOUAILLAISE





(Cliché Ouest-France.)

An oferenn-bred e Landevenneg, d'an 13 a viz Gouere, kanet gant an Tad Colliot, en-dro d'ezan ar venec'h. An devez-se a zo bet pardon bras kenta Sant Gwenole. Breiz a-bez a oa eno bodet war zouar santel ar manati koz kroget da sevel a varo da veo.